

KEAR IS, AR ROUE GRALON,

HAG ILIS MIRAKULUZ ANN ITRON VARIA REMENGOL.

(14)

« 'Neb a bed Gwerc'héz Remengol
» Birviken ne daï da goll!... »

Enn Escopti Kerne, el lec'h ema brema mór Douarnenez, e oa guec'hal eur gear vrás meurbet, hanvet Is.

Eur voguer ledan hag huel, gant sklujou houarn he diffenne deoz ar mór. Er gear-ze ne velet, e touez an dud pinvidik, nemet dizurz, goall exempl ha fallagriez. Gralon pehini a chome neuze er gear a Is, a oa Rôue Breiz-Izel. Bet e oa brezeller en he iaouankis, ha rust enn andret he zujidi ; mes enn he gosni, sklerigennet dre ar feiz kristen, e teuaz da veza dous evel eun oan. Hirvoudi a re, aliez war dizursou Is, ha war ar vue dirollet a rene he verc'h, ar brinçès Ahès, gant an noblans iaouank a gear ha deuz ar vro hanvet, hirio, Kear-Ahès, pehini a oa 'dez-hi a leve.

Enn amzer-ze, ive, e oa e Breiz-Izel, daou abostol santel, daou vignon da Zoue, sant Kaourintin, kenta Eskop a Guemper, ha Sant Gwenole (1), kenta abad a Landevennek ; alies o devoa prezeget ar feiz er gear a Is, ha gourdrouzet ar Roue Gralon, abalamour d'ann droog-oberou, d'ann torfejou ha d'ann injustisou a ret, bemdez, e pales he verc'h iaouank : mes goab a ret anez-ho, hag ar Roue, sempleteet dre ann oad, nen devoa mui a c'halloud avoalch'h evit arreti dizurzou ker bras.

Doue a skuizas, er fin, o velet Is kaledet enn he fec'hejou, hag a roaz da anaout da Æl Breiz-Izel, he vignon, Gwenole, penoz, eb dale pell, ar gear gaér-ze a vije beuzet gant ar mór. Kerkent, Gwenole a bignaz war he varc'h, hag a redas da gear Is, o sonjal c'hoaz mouga koler Doue. Mes tremenet e oa ann amzer a druez. P'a en em gavaz an abad santel, war dro anter-noz, sklujou Is a oa digor, hag ar mór a c'hoaze spountuz, o tiruillat war ann dud, ann tier hag ar palesiou. Gwenole ne allas savetei nemet Gralon ep ken ; gwelet a rer c'hoaz roudou treid ar march' er garrek, war behini, abaoe, abaded Landevennee, araok komer ho c'harg, a deu da ober ho feden ha da anaout ar Roue Gralon evit fondatour ho c'houent.

Ahès, merc'h fall ar Roue, kiriek a revin Is, a oë troët e *Mari-Morgan*, anter maouez, hag anter pesk. Pa bar al loar, he c'lever c'hoaz aliez o kana, war mór Douarnenez a uz revinou ar gear veuzet. He daoulagat a zo evel diou stereden, he bleo evel ann aour, he gouzoug hag he diou vronn ken gwen hag ann erc'h, hag he mouez melodiz a laka da gouzkat dre he chalmou ; evel ze, martolodet ar vro, raktal m'a he c'hevont, a lavar entrezho, gant spouron : « Tec'hom, Ahès, a zo savet deoz he falèz, ar gwali » amzer ne ma ket pell ha ma taleomp, e vezimp tolet, kousket, « var ar rec'hier. »

Evel Sodôm, Gômor ha Babylon, Kear Is ne m'a mul ; bag hirio ar mór a ruill dreist he fenn,

Da zao-heol Gralon, o veza pignet, gant Gwenole, war leñ Mene-Hôm, a dolaz, ac'hano, eur zell truezuz war he lere'h : Mes el lec'h ma edo ar gear gaér a Is, ne velaz mui nemet mór

(1) *Guen-oll-e, Oll-e-Guen* (il est tout blanc). hanvet, evel-se gant he vamm, ar Santes Ven, abalamour m'a oa eur buguel koant ha fur. Sant Gwenole, dre he vertuziou, en deuz meritet anh'hano. Kær a Æl Breiz-Izel (L'ange de la Bretagne.)

— 2 —

Douarnenez, hag e kouezaz d'ann daoulin evit trugarekat Doue bag ar Werc'hez da veza saveteet he vuez.

Pa zavaz diwar he zaoulin, e velas dindan ann heol, o luguerne, *Ru-men-goulou*, pe *Men-ru-ar-Goulou*, war pehini vije sakrifiet tud e beo, ha bep mis, eur buguel bian, c'hoaz euz ar vronn. Neuze, beuzet enn he zaëlou, hag he zaoulagad savet e trezec'h ann En, e lavaraz d'he vignon santel :

- War ar Men ru zout, konsakret da eun Doue barbar, me a
- » rai sevel eun Ilis kaër d'ar Werc'hez, hag el leac'h ma skuiller
- goad ann dud da Deutatès, e skuillo Mam ar gwir Doue he
- » grasou war Breiz-Izel. »

Gralon a zalc'haz mad d'he c'her, ha beleien ar Baiannet, o veza en em revoltet, pa veljont dispen templ ann Doue faoz Deutatès, ar Roue kristen ho zrehaz e kever Argol, e penn ar Vretonnet konvertisset.

Goude beza gret he beden, war Mene-Hôm, ar Roue Gralon a heuillas Gwenole da Abati Landevennek, savet gantan, eun neubeut blaveziou kentoc'h. Diaraok kement-ze, en deoa, c'hoaz roët he balez, e Kemper, da Sant Kaourintin, pehini en deoa torret he naon dezhan, ha d'he gompagnuez, gant eun tam deuz he besk bian. E plas ar palès-ze, e ma brema Iliz kaër kathedral Kemper.

Gralon a dremenaz e Landevennek, ar rest euz he vuez, enn eur binigen galet, hag aliez e kare mont gant he vignon ker da Remengol, da bedi evit he bobl, ann *Itron-Varia-Remed-Oll*. Beza en devoa an eur d'he gwelet brudet braz e pevar c'horn Breiz-Izel, hag o verval etre divrec'h Sant Gwenole, e Landevennek, e recommande he ene da Zoue, en eur lavaret gant fizianz :

- Itron Varia Remengol,
- » Mirit ouzin na zin da goll. »

Pemzek kant vloas a zo, a baoue, ma e maro Gralon, hag ar Vretonet, pere zo, bepret, tud a feiz hag a galon, o deuz c'hoaz sonj euz ho Roue koz, hag euz e vignon, Sant Gwenole. Mes ma c'hanavesent guelloc'h histor ho bro gaér, pa zeont da zul ann Drindet, da bardon braz Remengol, ha pa velont môr Douarnenez, Mene-Hôm, Landevennek, ha tour huél Iliz mirakuluz ann *Itron-Varia-Remed-Oll*, e lavarfent, ann daëlou, enn ho daoulagat, enn eur vale gant respect, war douar ar Sänt hag ar Rouaned :

- Braz ar burzudou a zo bet,
- » Ebarz enn amzer dremenet !.... »

Braz ive ar burzudou a ra c'hoaz, hirio, ann *Itron Varia Remengol*, enn andret ar Vretonet, ha dreist-oll, enn andret ar belerinet a deu, bemde, d'he gwelet, aliez euz a bell bro, ha kalz anezho diarc'hen, hag e korf ho rochedou.

Ar vinoret dilezet, ann intanvezet paour, ar beorien noaz, sourdardet Breiz-Izel, e kreis tân ar brezel, ar vartolodet war ar môr braz e furol, ann holl dud affliget, a gorf, a galon hag a speret, darn eu ho foaniou, darn enn danjerriou, darn all enn dizesper, ha darn, ive, war guele ar maro, o deuz sonj euz ho mamm dous ha mad, hag aliez e leveront dezhi, gant karante ha gant fizianz enn he galloud, hag enn he madelez :

- O Gwerc'hez sakr Remengol, patronz Breiz-Izel,
- » Pedit evidomp, hirio, ha pa rankimp mervel;
- Pedit evit Breiz-Izel, evit ar Vretonet,
- » Ho deus ho karet, ho kar, hag ho kar bepret. »

GWERZ AR ROUE GRALON HA KAER IS.

War don *Judik hag Holofernes*; pe war don *Bosen Elliant*.

I.

Petra 'zo neve e kear Is,
Ma ze ken foll ar iaouankis?
M'ar klevan-me ar biniou,
Ar vombard hag ann delennou?

N'euz e kear Is netra neve,
Ann ebattou ma 've bemde,
N'euz e kear Is nemet traou koz,
Ann ebattou ma 've bemnoz.

Bojenno drez so divoannet
A dor ann ilizou prennet,
Ha war ar beorien e wëla,
Ec'h hisser ar chass d'ho drailla.

D'ha c'hoezek vla, ann oll verc'het
N'ho deuz Doue 'met ar pec'het
Ha, da ober he gurunen,
E roont ho c'haëra rosen.

Ahès, merc'h ar Roue Gralon,
Tân ann ifern enn he c'halon,
Er penn kenta deuz ann diroll,
A gass d'he c'heul ar gear da goll.

Sant Gwenole, gant kalonad,
Zo bet me'ur vec'h e kaout he zad,
Ha gant daëlou, aun den Doue:
Hen deuz lavaret d'ar Roue:

— « Gralon, Gralon laka eves
» D'ann dizurzou a rên Ahès:
» Rag tremenet vo ann amzer
» Pa skuillo Doue he goler.

» El lec'h m'a voa c'hoarzadek kent,
» E vo neuze skrignadek dent,
» El lec'h ma voa kanouennou,
» E vo neuze skrijadennou!... »

Hag ar Roue koz spouronnet,
He verc'h hen deveuz kelennet:
Mes, diskaret dre ar gozni,
N'euz mui ann nerz da stourm out-hi.

Ha, skuis gant rebechou he zad,
Evit mont deuz he zaoulagad,
Hi 'deuz gret, gant droug sperejou,
Eur palès kaër, tost d'ar sklujou.

— 4 —

ZI R E D E R A R E W
 Eno, gant he amourouchen ,
 E-ma fennoz ann obaden ;
 Eno , enn aour hag er perles ,
 Evel ann heol e pâr Ahès...

II.

— « Plijadur dec'h er palès-man ,
 » Merc'hed chentif ha potret skan ,
 » Plijadur dec'h ha nosvez grén , »
 Eme eur Prinz en eur antren .

Ar Prinz a zouge dillat ru ,
 He varo a voa hir ha du ,
 Hag he izili a verve ,
 Hag he zaoulagad a zeve .

— « Ra viot deut mad , estranjour ,
 » E-me Ahès gant eur beg flour ;
 » Ia , ra viot deut ar gwella ,
 » Mac'h hanveit ann traou falla . »

— « Neuze m'em bo digomer mad ,
 » A respontas ann divroad :
 » Rag me er fall zo ken disket
 » 'Hag ann hini n'euz hen krouet!... »

A kerkent Ahès d'er pedi ,
 Da ober eun dro zanz gant-hi ,
 Hag ann oll , a eneb Doue ,
 Gwassa mac'h allent a doue .

Pa voa d'ann abaden-ze fin ,
 Danser Ahès , en eur c'hoarzin ,
 Hag en eur zevel he ziou skoa ,
 A lavaras : — « N'ouzoch' netra !... »

« Kerc'hit din-me deuz a gear Is
 » Vesseillou zantel ann Ilis .
 » Kerc'hit kroas ar c'hruusufiet
 » Eun hosti sagr hag e velfet !... »

Ahès a respontas timad :
 — « Kavet vint enn Ilis va zad ,
 » Rag va zad diot-me a gred
 » Enn trompler-ze a Nazareth !... »

Tri a redas e berr amzer ,
 Hag a ziskaras ann Aoter ,
 Hag ann traou zagr a we donget
 Etre ho daouarn miliget .

Ar prinz ru , raktal m'ho gwelas ,
 A greiz he galon a c'hoarzas ,
 Hag a lavaras c'hoas enn-han :
 — « Plijadur dec'h er palès-man !... »

Da genta a dolioù boutou ,
 E vrujunas ar vesceillou ,
 Goude 'flastras ar grussufi ,
 Hag e krenchas war ann hosti !... »

— 5 —

Ha war-n'he, gant ann oll e noas,
En eur gana : — « Malloz d'ar groas !... »
E raz, e sez stum dishenvel,
Dansou ar sez pec'het marvel !.

Kerkent ar palès a grenas,
Hag ar c'hurunou a strakas,
Hag a dreus ho zellou nec'het,
E skôas tân glaz al luc'het.

— « N'a c'houi 'vel e-me ar Prinz ru :

» Me laka Doue war e du !... »

Ma lavarent oll gant glac'har :

— « Ahès e deuz kavet he far !... »

III.

Pa voa fin d'ar sakrilejou,
Messager ann droug sperejou,
Chomet he eunan er palès,
A dosteas da gaout Ahès.

— « Va doussik koant, merc'h da C'hallion,

» Ha muia karet va c'halon,

» Ha nalfen me ket eneb gis

» Guelet alc'housk sklujou kear Is. »

— « Va zad a zoug enn he gerc'henn,

» Ann alc'housk aour deuz eur chadenn,

» Ha va zad breman zo kousket,

» Ha kaout ann alc'housk n'allan ket.

Mes hen d'he zreid ann eum strinkas,

Ha d'he bornik flour a bokas,

Hag he dallas dre he zellou

Karget a dâu hag a zaëlou.

IV.

Hep goud ar pez a dremene,
Neuse, eur penad a-c'hane,
ENN he balès ar Roue koz,
A voa kousket e kreiz ann noz.

Kambr paour Gralon ne voa enn-hi
Netra nemet eur grussusi
Deuet a zorn eur mignon ker,
Sant Kaourintin, Escop Kempfer.

Netra nemet eun Aviel,
Roët c'hoas gant eun den zantel,
Roët de-han gant Gwenole,
Evel eur merk a garante.

Kaér enn he gozni, 'vel eun Ael,
E kouske Roue Breiz-Izel,
Hag, en dro d'he dall, he vleo gwen,
A re, dispak, eur gurunen.

— 6 —

Neuze , Ahès , ar Brinsez fall ,
 Evel pa vije skoet dall ,
 Enn he gampr , hep aon rag Doue ,
 A deu da laeras ann ale'houe.

En eur vale , war beg lie zroad ,
 Ar verc'h a dosta skan d'he zad ,
 A goustadik deuz he gerc'hen ,
 A deunn , n'eur c'hoarzin , ar chaden.

V.

Piou a deu du-hont gant ar ru ,
 Pignet war eun hinkane du ,
 Hag hen d'ann daoulamp war he gein ?
 Ken a strink ann tan deuz ar vein ?

Hennès eo messager Doue ,
 Digasset enn Is d'ar Roue .
 Hennes eo abostol ar Feiz ,
 Sant Gwenole , karet e Breiz .

Tostât 'ra enn eur c'haloupad
 Enn he zorn deo he vaz Abad ,
 Hag eur stôl aour war he zaë venn ,
 Hag eur c'helc'h tan enn dro d'he benn .

Setu hen e d'ôr ar palès
 E p'hini e kousk tad Ahès ,
 Diwar he varc'h , ann den zantel
 A c'halv , enn noz , a voëz huel .

— « Gralon , Gralon , sao hep dale ,
 » Sao evit heuilla Gwenole ,
 » Sao evit tec' hel rog ar mîr :
 » Sklujou Kear Is a zo digor ! »

Hag ar Roue koz trubuillet ,
 Er mes he vele zo saillet :
 — « Din-me , din-me , va marc'h prima ! ..
 » Siouas ! peur-gollet ar gear ma ! .. »

Ha war he varc'h , eberr amzer ,
 E kerz da heul he vignon ker ,
 Ha war ho lerc'h , en eur thiudal ,
 E klêvont ar mîr o ruillat .

Neuze ar Brineez dirollet ,
 He amourous gant hi kollet ,
 Dre gear Is , hag glei hag a zeo ,
 A rede dispaket he bleo .

Pa glevas daou lamp ar c'hezek
 Arog ar mîr e tiredek ,
 Dre al luc'het gant nec'hamañt ,
 'Hanveaz he zad hag ar zant .

— « Va zad ! va zad ! ma-'r'-em c'harit ,
 » War ho marc'h skan ya c'homert :
 Hag , eb respont , ann tad tener
 A zao he verc'h war ann tailler .

— 7 —

Kerkent ar mōr a vuanna,
 Ha Gwenole, en eur grena,
 A gri : — « Gralon, tōl ann diaoul-ze,
 « Divar dailler da hinkane !... »

Kouskoude c'hoas, leun a enkres,
 Ann tad a zal'h ar pec'heres.
 Mès ar zant a ra sin ar groas
 Hag a stog out-hi penn he vaz.

Kerkent, mestres ann droug-speret
 A ruill er mōr bras fuloret,
 Hag e kleo tost ar Roue koz
 Eur c'hoarzin skiltr' e kreiz ann noz.

Mès, rentet skanvoc'h, hep dale,
 E sail prim da c'heul Gwenole,
 Hag he varc'h, gleb he beder c'harr
 A lamp deuz ar mōr enn douar.

Brema, ed e Mari Morgan,
 Ahès, deuz skeud al loar, a gân,
 A gan, hag en eur vousc'hoarzin
 A grib, er mōr, he bleo bezin.

VI.

Da zao-heol, ar Sant ha Gralon
 A bigne war lein Mene-Hôm,
 P'hini, he dreid e-barz enn trez,
 'Zao he benn war Douarnenez.

Ac'hane, roue Breiz-Izel
 War he lerc'h a dolas eur zel :
 Mès, el lec'h Is, gant he deg dor,
 Ne velas mui nemet ar mōr.

— « Eur gear em boa deuz ar gaëra,
 » Ha setu hi et da netra !... »
 Hag he galon, oll a fraillas,
 Hag he zaoulagad a wëlas.

— « Gralon, Gralon 'me Gwenole,
 » Gralon, d'ann daoulin ganem-me,
 Ha Gralon dindan he c'hlac'hар,
 A goë d'ann daoulin d'ann douar.

Hag eno, dispak he vleo gwenn,
 Hag he dall pleget er boultrenn,
 E lavare c'hoas ar Roue :
 — « Ra vo gret bolonte Doue !... »

Pa zavas diwar he zaoulin,
 Dindan tân flamm heol ar mintin,
 E velas, a dreuz he zaëlou,
 E lugerni Ru-men-goulou.

War ar men-ze, hon tadou koz,
 A skuille goad d'eun Doue foz,
 Hag ar Roue, e berr amzer,
 A lavaras d'he vignon ker :

— 8 —

- » Du-hont, e memor a' gear Is,
- » Me savo d'ar feiz eunn Ilis,
- Hag, evit testeni d'an oll
- M'he galvo Ilis *Remengol* (1),
- » Rag war dolmen ru Teutatès,
- » Me lakeï da rën ar Werc'hés,
- » Ha, bep bloas enn enor d'ar Groas,
- » E rin ober eur pardon bras.
- » Eno, ann oll dud affliget
- » A gavo d'ho foaniou remed,
- » Ha silvidigez d'ho ene,
- » Dre c'hraz Mari, gwir vamm Doue.
- » Pa vo ann doneou maro,
- » Ha koët meur a goat dero,
- » Eunn de, deuz ar pevar avel,
- » E tevio d'i pobl Breiz-Izel.
- » Neuze, ma ve sonj a C'hralon,
- » E vo lavaret a galon :
- » Bras ar burzudou a zo bet
- » Ebars en amzer dremenet ! ... »

PEDEN AR ROUE GRALON

D'ann Itron Varia Remengol.

Itron Varia Remengol,
Mirit ouzimp na zaïmp da goll ;
Pedit ive, ho mab Jesus,
Ma vezimp gantan evurus,

Itron Varia Remengol,
C'hui eo Rouanez ar bed oll,
Bezit hor mamm, hor Batrones,
Ha ni ho meulo da james.

(1) Remengol, hanvet goec'hal, *Ru-men-goulou*, da lavaret e, *Men-ru-ar-goulou*, abalamour ma oa eno, eur men ru, pe eun templi, konsakret da c'houiou De, enoret evel eun Doue, dindan ann hano a Teutatès (Doue-Tad) ar Roue Gralon, goude beza diskaret ann templ-ze. ha savel, enn he blaz, eun ilis kaer da vamm ar guir Doue, a chanchas hano payen *Ru-men goulou*, enn hano kristen a *Remengol*, da lavaret e, *Remed-Oll*, deuz a behini ar Batrones a zo hanvet ann *Itron-Varia Remed-Oll* (*Notre Dame de Tout-Remede*) abalamour d'ar burzudou bras a ra bemdez, eno, ar Werc'hés, abaoü amzer ar roue Gralon, betek hirio.

Eno, zo c'hoas induljançou a re vrassan roet gant hon tad santel ar Pab, d'an oll gristenien, a deu d'a Remengol, da bidi, a galon, Patrones Breiz-Izel. Dre eur skrit apostolik roet e Rom, en ilis sant Pér, kement beleg a lavar ann oferen war aoter vrás ann Itron Varia Remengoll a denn a boaniou ar purgator eun ene, p'hini a ia raktal d'ar baradoz.

An dregont a vis mae 1858, ann Itron Varia Remengol a zo bet kurunet gant eur gurunen aour ha perlés roet dez-hi gant hon tad santel ar Pab Piñao.

Remengol a zo bet, a viskoas, ar gaëra hag ar santela Ilis a Vreiz-Izel; enori a rer enn hi, darn euz a groaz hag a gurunen spern J.-C., darn euz a relegou ar Werc'hés, saintez Anna, saint Joseph, ann Ebrestel, ann Doctoret euz ann ilis, Sänt Breiz-Izel, ha relegou ouéh penn daou vil Sant atl, hervés an dud koz, peb guir Vreton, a gle, eur veach, da viana, *beo pe varo*, ober pelerinach Remengol.